

BUEZ SANT VODEZ

hag

Histor Henvic



SANT-BRIEG

Ti Moulerez Sant Gwilherm, bali Charner

1918

Buez Sant Vodez

hag Histor Hennic

BUEZ SANT VODEZ

hag

Histor Henvic



SANT-BRIEG

Ti Moulerez Sant-Gwilherm, bali Charner

1918



Église catholique
en Finistère


Document numérisé en 2017



BUEZ SANT VODEZ

HAG

HISTOR HENVIC



HENVIGIZ,

Neket traou a vank d'in da ober brasoc'h leor hag hirroc'h histor. Mes al leoriou braz a goust ker, hag ann historiou hirr ne blijont ket kalz. Setu perag em euz krennet va leorik. Divezatoc'h e vezo gwelet petra da ober. Da c'hedal, her c'hinnigan d'ehoc'h evel testeni euz va c'harantez evidoc'h.

Her c'hinnig a ran dreist holl d'ann Aotrou Queinnec, bet Persoun kanton Taule, hag abaoe Chaloni katedral Kemper. Anaoudegez vad a dlean dezhan evit ar vad en deuz great d'inn ha dam farezioniz, keit ha m'eo bet Persoun e Taule, hag e kendalc'h bepred da ober abaoe ; mil bennoz Doue dezhan !

Breman, levrik, kerz dre ar vro,
Ha ganez ann holl a zesko
Histor Henvic, Buez Sant Vodez
Patron benniget hor parrez.

Guechall-goz

Ar brezounek, ar iez a gomzomp, a zo unan euz ar re gosa euz ar bed.

Hon tud koz a deuaz euz ann Azii, var dro e'hueac'h kant vloaz goude ginivelez hor Zalver. Da genta e teujont a vandennou bihan. Pemp kant vloaz goude, ar vro a hanver brema *Frans* pe Bro-C'hall a oue goloet gantho. Rei a reat-dezho ann hano a *Celtes* pe Gallaoued koz.

Lod anezho a dremenas ar mor evit mont da Vro-Zaoz. Rak-se Bro-Zaoz a oue karget da genta gant tud euz ar vro-ma. Ar brezonnek eta n'eo ket deuet euz Bro-Zaoz e Breiz. Ar c'hontrol eo a zo guir, hon tud koz eo o deuz kaset di ar brezonnek.

Hogen, respet ato d'ar re goz ha d'ann traou koz pa'z int mad. Dioc'h ma lavar ann dud desket, ar brezonnek a zo eun dra vad, ha kalz kaëroc'h eget ar gallek. (1)

(1) Eul loden euz Bro-Zaoz a gomz ato ar brezonnek.

Hon tud koz, pa oant pañanet

Hor bro Breiz-Izel, ha Breiz-Veur pe Bro-Zaoz, n'int ket ato, broiou kristen. Araok ginivelez hor Zalver, ha zoken pell goude, hon tud koz a oa ive pañanet.

Abarz daoulina dirak Kroaz Jezuz-Krist, ar Vre-touned a rankas soubla dindan galloud ar Romaned deuet d'ar vro-mâ da ober ho mistri var-dro kant vloaz araok ginivelez hor Zalver.

Hon tud koz pañanet, mar d'edont dindan galloud ar Romened, a ioa muioc'h c'hoaz dindan galloud ann drouk spered. N'o doa na vertus, na justis, na liberte, na truez, na karantez, araok ma teuaz hor Zalver Jezus-Krist var an douar.

Enn amzer goz, hon Arvor
A ioa teval-maro,
Satan en doa he gador
E skeud ar gwez dero,
Ann Arvoriz a veve,
'Kreiz ann devalijer,
Pep tra dezho ioa Doue
Nemet Doue hebken.

Ar peulioù mean hag ann daolioù-menn a ve-

ler ker stank er vro-mâ, hag a velet c'hoaz, n'euz goall-bell, e douarou ann Ingoz, e parrez Henvic a zo eun testeni a gement-se. Var ann daoliou-menze, ann drouizet, falz beien eon tud koz, a lakea ar goad da redet, goad anevaled, ha goad tud avechou.

Ar relijion gristen

Erfin e plijaz gant Doue digas, d'ar vro-mâ be-leien katolik da brezeg ar Feiz kristen hag ar guir religion. Unan euz ar re genta, oue ar belek santel Drennalus diskibl da Joseph Arimathi, var a lavar ann Tad Albert.

Ar belek santel-se a ziskennas e bro Leon, a lakeaz Montrouleziz da zizrei ouz Doue, hag a reaz kalz vad er vro-mâ.

Neuze sklerijen ar Feiz a deuaz a nebeudou da baraenn hor bro, hag hon tud koz a guiteaz a galonvad eur religion ken faoz ha ken didruez, evit en em daol etre divreac'h Jezuz-Krist.

Oh ! Henvigiz, va breudeur, trugarekaomp ann Aotrou Doue da veza digaset kannadet ar guir Seiz enn hon touez, rak heb ar guir relijion n'euz beva mad ebet.

Trugarekaomp anezhan da veza klozet da viken ann amzer ma rede goad hor c'henvroiz dre zourn didruez beleien an diaoul.

Oh ! nan, ann ekleo ne gaso mui dre ar vro kriadenn estlamus eur Breizad o vervel var ann dolmen dre gontel-laz ann Drouiz.

Religion hor Zalver a zo eul lezenn a garantez evit silvidigez hon eneu. Dalc'homp mad dezhi bepred, n'euz forz pegen trubuilluze vo ann amzer. Ar Groaz a zo e peb leac'h enn hor bro; evit diskuez eo gounezet da Jezuz. Hor lagad var ar Groaz, n'a zeimp biken da goll.



Koulzgoude, ar Religion gristen n'e deuaz da veza krenv aoualc'h e Breiz-Izel, nemet tri pe bevarc'hant vloaz divezatoc'h ; pa oue savet kouenchou hag ermitachou dre ar vro, ha pa deuaz mennec'h pe ermited santel euz ann Irland pe Vro-Zaoz, hanvet enezen ar zent d'ar mare-ze. Diez e ve niveri ann dud santel a deuaz ac'hano d'ar vromma :

N'ouffen ket niveri :

Jaoua, Paol, ha Tenenan,
Maudez, Guesnou ha Majan,
Guevrok kouls ha Sezni,
N'ouffen ket niveri.

(Tad Alb)

D'ar mareou-ze, ann Aviel,
E Bro-Zaoz hag e Breiz-Izel,
'Zo e brezounek prezeget,
Gant ar Zent braz d'ar Vretouned.

Setu perak e leverer :

Ar pezh vo gwir e peb amzer,
Ar brezounek hag ar feiz
A zo breur ha c'hoar enn Breiz.

Buez Sant Vodez Abad (VI et kanved)

Maodez, ginidik euz ann Iverson (*Irland*), a ioa mab da eur roue bihan euz ar vro-ze. Erle he dad, ha Getuza he vamm, a ioa kristenien vad ha daou bried a zoujanz Doue meurbet.

Evelse, Doue a vennigaz ho friedelez en eur rei dezho dek krouadur, seder ha goubariet mad. Maudez oa ar iaouanka. P'oa bihanik, a oa koant evel eun eal ha laouen evel ann deiz. Setu perak, dioc'h ma lavar lod, e oue hanvet, Maudez, pe Mao-dez. = Mao = laouen, dez = deiz = 've ann deiz.

O veza m'oa ann deket, e oue goestlet da Zoue evel deok. He dad hag he vamm ho-unan her savaz ; var ho barlenn eo e teskaz he greansou pe ar c'hen-teliou kenta euz ar religion.

Mes d'ann oad a zeiz vloaz avad, e oue kaset d'ar skol, da eur gouent, gant mistri gweziek ha santel. Tud pinvidik ar vro a gas e abred ho bugale d'ar gouent-ze, da zeski gant ar venec'h, skianchou ar bed ha dreist-holl skianchou ar zent. Maudez ne oue ket pell evit dont da veza unan euz ar re zesket hag euz ar re zantella euz ar re a ioa er skol-ze asamblez ganthan.

Pa oue deuet enn oad, e resevaz ann Urziou-Sakr. Kerkent ha ma oue beleget, en em lakeaz, enn dra c'helle, da brezeg da dud he vro, ha da zeski dezho dre he skueriou, hag he gomzou, servicha Doue ervad, ha kerzet var hent ar baradoz.

Koulz goude, o veza e kreiz tregas ar palez, ne c'helle ket servicha Doue kement ha ma karie. Rak-se e sonjaz e oa guelloc'h dezhan kuitât he vro, hag o veza anavezet oa bolontez Doue kement-se, e kemeraz daou vanac'h iaouank, Botmaël ha Tudi, hag ez ejont ho zri d'ar pors mor tosta, el leac'h ma kavjont eur vag hag ho digasas da Vreiz-Izel. Disken a rejont e Landreger, el leac'h a hanver breman Lanvodez, enn Eskopti Sant-Briec.

Heb dale, ar brud euz a zantelez Modez a reaz da eleiz a dud dont d'e gaout.

Parea a rea tud sounnet ho izili, tud dall, tud bouzar, tud kemeret gant ann diaoul. Gant iec'hed ar c'horf e roë dezho ive iec'hed ann ene.

Evit pellât diouz trouz kasaüs ar bed, a vire outhan d'en em rei d'ann Aotrou Doue evel m'en doa c'hoant, ec'h en em dennas enn eun enez c'houez, eul leo bennak diouz ann douar-braz. Biskoaz den n'en doa gellet chom enn enezen-ze, kement a amprefaned louz ha binimuz a ioa ebarz, Maudez a reaz rins varnezho, hag a zavaz eno eun tammik ti-bidi gant eul lochenn e kichen.

Kaër en doa tec'het diouz ar bed, he zantelez a rea d'ann dud mont var he lerc'h, ha meur a hini a c'houlennaz chom eno asamblez ganthan da zeski

hent ar baradoz; hag evelse he venec'h a deuaz buan da veza niveruz. Betek neuze, n'oa eno nemet dour sall, mes, ar Zant dre eur beden a lakeaz da zevel eur feuntten dour dous evit he venec'h. D'ar mareou-ze ive ar Zant a reaz c'hoaz eur mirakl all. Daou vreur eur ar c'harter, daou baotrik iaouank, a ioa o c'hoariellat, hag unan anezho, heb e zonjal, a zigouezaz ganthan laza he vreur. Ar Zant, o veza klevet kement-se, a redaz raktal da gaout ar paotrik maro, hag a roaz dezhan ar vuez.

Enn enezen-ze e tremenaz ar rest euz he vuez oc'h en em zantelât he-unan, o santelaat he venec'h ha kement-hini o doa darempred ganthan.

Erfin e kouezaz klanv, ha goude beza resevet gant joa he zakramanchou divezhan, e tremenaz e peoc'h, he zaoulagad o para var he grusifi. He gorf a oue beziat enn iliz ann enezen, ha Doue en deuz, abaoue, embannet he zantelez dre galz miraklou.

Tri-ugent iliz pe japel a zo bet savet e Breiz-Izel en honor da zant Vodez; goude sant Erwan, n'euz ket eur zant hag a ve bet pedet muioc'h gant Breiziz-Izel.

Tra souezuz, lochen sant Vodez, hanvet *Forn Vodez*, abalamour m'eo great var rond evel eur forn, daoust dezhi da veza koz, a zo ato enn he zav. Ar varlotoded, en eur dremen ann treiz-mor a zo eno e-kichen, ne vankont morse da ober sin ar groaz ha da lavaret eur beden, evel ma ra ive tud ar vroman, kerkent ha ma velont chapel Itron-Varia Callot, a dost pe a bell.

Remarque. — Dans l'ancienne église de Henvic, on voyait aux côtés du maître-autel les statues des deux patrons : saint Maudez et sainte Juvelte, sa sœur. Sous celle de saint Maudez, dans une sorte de diptyque gothique, étaient quatre bas-reliefs retraçant les principaux actes de sa vie :

1. Saint Maudez guérit les infirmes,
2. Reçoit la bénédiction de son père,
3. Délivre un possédé,
4. Rend la vue à un aveugle,
5. Bénit ses disciples,
6. Sa mort précieuse.

Sous sainte Juvelte :

1. Sainte Juvelte a ressuscité un Seigneur, et autres.
2. Sainte Juvelte a délivré des possédés, des fols, des enragés.
3. Sainte Juvelte a donné la vue aux aveugles, l'ouïe aux sourds, et la parole aux muets.
4. Sainte Juvelte défendait aux oiseaux et bestes d'endommager le bled des pauvres gens.

TAOLENNOU

SANT VAODEZ HA SANTEZ ULVEN

Patroned parrez Henvic

TON : *Sellit piz ouz ann taolennou.*

1

Goude Jezuz hag ar Verc'hez
Kacra tenzor n'euz eur barrez,
Kacra tenzor eo he fatron,
Hennez eo he guella mignon.

2

'Vel Moïzez var ann huël
Epad ma stourme Israël,
Ar patron 'zo dirag Doue
O pedi 'vit he vugale.

3

Laouen ez eo pa'z int laouen,
Anken en deuz p'o d'euz anken,
Anken dreist holl p'ho guel kuezet.
Kuezet e bouillen ar pec'hed,

4

Neuze he vouez 'gri truezuz,
A gri truezuz ouz Jezuz :
« Pardon dezho, rag ne ouzont
« Ne ouzont ket petra reont. »

5

Hon tadou 'joazaz sant Vaodez,
Hag a kizelchont e vuez
He holl vuez e c'huec'h taolenn,
C'huec'h leorik eaz d'ann holl da lenn.

6

Sant Vaodez er genta taolenn
A zo etouez ar glanvourien
O rei dezho, enn han' Doue
Enn han' Doue, joa ha pare.

7

Enn eil sant Vaodez a gimiad
Eus karantez ha ti he dad,
'Vit servicha Doue hebken,
'Vit beza sant ha netra ken.

8

Enn trede taolenn, sant Vaodez
'Zo eun den diaoulet n'he gostez;
An den a gren, ar Zant a bed :
'Tec'het 'ra kuit ann droug-spered.

9

Maodez, enn daolenn pederved,
D'ar re zall a ro ar guele.

Guelel ar c'horf hag ann ene
'Vit bale var henchou Doue.

10

Sant Vaodez, er bemped taolenn,
'Ro he vennoz d'he ziskibien,
'N eur lavaret : « Kenavezo,
» Kenavezo enn hor guir vro. »

11

Er c'huec'hved taolenn, sant Vaodez,
A varv dispont ha dienkrez,
Achu ganthan he labourou,
Gounezet ganthan ann envou.

SANTEZ ULVEN

E gallek : *Juvelte ou Juveltine.*)

1

Ma n'euz eur patron hor parrez,
He deuz ivez eur batronez,
Santez Ulven c'hoar hor patron
Ha c'hoar dezhan e peb feson,

2

Sant Vaodez 'zo eur zant dispar
Santez dispar ivez he c'hoar ;
Choazet eo bet gant hen tud kor
Vel eil alc'huez ar baradoz.

3

E peder daolenn eo laket
Ar c'haera burzudou 'deuz gret,
Merkou skler e kare Doue,
E kare he nessa ive.

4

Ar Zantez, enn daolenn genta,
'Fiaz eun den maro, 'zo n'he za.
Ra eur bedenn ha sin ar groaz,
Hag ann den ker iac'h ha biskoaz.

5

Enn eilved taolenn, ar Zantez
A druez euz ann dudou kez,
Euz ar re foll, ar re diaoulet,
'Re 'zo bet gant chass klanv taget.

6

Ar Zantez, enn drede taolenn,
A ro pare enn aluzenn ;
Enn dro dezhi 'zo beh seurt tud,
Tud vouzar, tud dali ha tud mud.

7

Er bederved, santez Ulven
A ziuall eost ar gouerien ;
Al laboused, dal m'ho goudrouz,
A dec'h kuit, sentuz ha didrouz.

8

Santez Ulven ha Sant Vaodez
Ken galloudus enn ho puez,
C'houi 'zo hirio galloudusoc'h,
Doue n'hell refus netra deoc'h.

9

Goulennit 'vidomp ar iec'hed,
Iec'hed ar c'horf hag ar spered,
Iec'hed dreist holl 'vit ann ene,
Ma kendalc'himp e gras Doue.

AMEN.

IMPRIMATUR,

G. Guédès.

nihil obstat.

Ce 9 Novembre 1907.

F. CORRIGOU, Vic. gén.

Relegou Sant Vodez

Sant Vodez a varvaz enn Eskopti Sant Briec. Setu perak he relegou a zo enoret enn eskopti-ze dreist-holl.

Ouzpenndaou c'hant vloaz 'zo, Iliz Henvic e deuz relegou sant Martin eskop Tour ; eun nebeut blavezioz 'zo e doa bet ann eurvad da gaout, digant ann A. Potron eskop Jericho, eun tammik euz a zaë ar Verc'hez-Vari hag euz a vantel sant Joseph. Beza 'zo ive eun tammik euz eskern sant Beneat Joseph Labre, hag euz dillad ar Plac'h eüruz Mac'harit-Mari Alakok. Ne vanke mui nemet Relegou sant Vodez.

Pa oue koumanset ann iliz nevez, ann Aotrou Eveno, ginidik a Zant-Briec, ha d'ar mare Superior Seminer Sant-Jakes e Guiclan, a c'hellaz kaout digant Eskop Sant Briec, relegou sant Vodez evit he iliz nevez. D'ar zul, 27 a viz Maë, e teuaz d'ho digas da Henvic. Ar procession a ieaz d'ho diambrouk betek Kervoaziou. Eno ann daou Aotrou Tanguy, daou vreur belek, guisket enn ho aournamanchou sakr, a zougaz gant eur respet braz, var ho diouiskoaz, betek ann iliz koz, ar relegou santel lakeat enn eur voestl alaouret. Neuze e oue kanet

ann oferen, ha goude ar Gousperou e oue roet ar relegou da bokat d'ar bobl niveruz diredet a bep tu da gemeret perz er gouel kaër-ze. Epad ann amzer-ze e oue kanet a greiz kalon, ar c'hantik dudiuz 'zo ama varlerc'h, great gant ann Aotrou Tanguy :

CANTIK DA SANT VAUDEZ

Digouez relegou ar Zant e parrez Henvic

27 mae 1900.

Ton : *Cantik Sant Paol*

(Canomp, canomp a greis kalon).

DISKAN

Autrou Sant Vaudez, hor patron,
Dalc'hit ar feis, en hor c'halon.
Feiz birvidik hon tadou koz,
Ma zaïmp ganto d'ar Baradoz.

I

Ho tad, ho mam, tud a feiz krenv,
A ziskoueze dehoc'h hent ann Env,
Enn ho falez, c'hoas bihanik,
C'hui oa santel 'vel eun Elik.

II

Euruz ar buguel savet mad,
Var barlen e vam hag e dad,
Hag euruz ar gerent d'ho zro
Ho mab a raï henor dezho.

III

D'ar skol e kassont ho bugel
Gant mistri gweziek ha santel
Ha Maudez, gant Doue galved,
A lavar kenavo d'ar bed.

IV

Eur Iverson, brema me vel,
Eur vag he gouel frank en avel,
O lammet var goajou ar mor
Hag o touara en Arvor.

V

Roudou ho treid ' zo var ann trez,
Rak ho pagig eo, Sant Vaudez.
Digasset hoc'h deomp gant Doue
'Vit he c'hloar ha mad hon ene.

VI

E douar Breiz c'hui ' peuz hadet,
Feiz kenv hag a zo diwanet.
Hag eost mad en deuz bet Doue
Da zougen da c'hrignol an Ee.

VII

Abaoue, karet en hor bro,
Dister ar vouez a lavaro
Nez dispar ho prezegennoù
Ha niver braz ho purzudou.

VIII

Hoc'h enezen n'he doa, guechal,
'Met amprefaned ha dour-sall ;
Dour dous he deuz dre ho peden
Hag amprefaned n'he deuz ken.

IX

Ann dud klanv, ann dud mahagnet
Dreisoc'h ho deze ar yec'het,
Ann droug-spered pell a dec'he,
Hag ann dud dall sklear a vele.

X

En hon touez mar deuz, siouaz,
Tud goal lakeet e pep gis c'hoaz,
Gant ar gaou tud keiz touellet,
Gant an drouk-spered tud dallet,

XI

Sant Vaudez, asroït adarre
Da gement zo klanv ar pare ;
Ra vo guelet c'hoaz peb Breizad
O vale start var an hent mad.

XII

P'ho peuz karet hon tadou-koz,
D'ho bugale roït ho pennoz,
Ar re man, deoc'h fidel d'ho zro,
A greis ho c'halon ho karo.

XIII

Ho relegou deomp digasset
A lakaï doun en hor speret
Sonj talvoudek a vuez santel
Ho peuz renet e Breiz-Izel.

XIV

Da zigemer ho relegou
Gant prez e savomp kanticou,
'Vit hoc'h henor, en hor parrez,
E savomp deoc'h eun ty nevez.

XV

Pa zaoulint en hoc'h Iliz
C'hui vo skoazel da Henvigis ;
Da dud ar mêt, d'ho douarou
D'ann dud a vor ha d'ho bagou,

XIV

Ha peb kristen a lavaro
Ea ho parrez, ha tro-var dro,
Ea env Sant Vaudez evurus,
Var ann douar zo galloudus.

J. TANGUY, *beleg*.

IMPRIMATUR

Corisop. die aprilis 24a 1900.

F. CORRIGOU,
Vicaire général.

Henvic (Le Vieux-Bourg)

(Henguic) conf. la reformation de 1445).

C'est une ancienne trêve de Taulé, érigée en paroisse
après la Révolution.

Ann Iliz koz

N'hellomp gouzout, d'ar zur, pe da vare oa bet savet iliz kenta Henvic, rak hor pauperiou koz ne d'eont nemeur enn tu all d'ar bloaz 1600. Lod a lavar e tlie ann iliz kenta beza bet iliz kouent araok beza iliz parrez. Leac'h 'zo d'her c'hredi, p'eo guir ann tiez tosta dezhi a zo, hirio c'hoaz, hanvet ar Venek, da lavaret eo tyez menec'h.

N'euz fors, amzer zo bet, iliz Henvic a ioa unan eus ar re gaëra er vro.

D'ar zul, 25 a Vengolo, 1613. Ann Aotrou Loiz Jacobin, Vikel-Vraz e Kastel, o veza deuet ama da zevel Breuriez ar Zakramant meulet ra vezo, a lavaraz d'ann Aotrou'n Eskop, pa zizroaz da Gastel : « Iliz Henvic, emezhan, evithi da veza bihan ha » dister, a zo kaer da velet evelato, unan eo euz ar » re gaëra a c'houffet da gaout var ar meaz. Kuzet » eo e touez ar gwez a zo bodet enn dro dezhi, hag » evel lakeat eno gant dourn Doue, evit he diouall » diouz ar goall avelou er goanv ha diouz tomder » ann eol bero enn anv. A veac'h ma he gweler en eur dremen. Ann iliz hag ar vered ato dalc'het kempenn ha deread da velet.

Ar Bourk

Er bloaz 1800, n'oa ti ebed er Bourk, koulz lavaret, nemet ar presbital, ann ti-forn, hag eun tamik stal hag a ioa stag ouz ar vered, ha n'oa fermet nemet naontek real ar bloaz.

Eur presbital nevez a voue savet er bloaz 1874 ; ann ti kear e 1868, hat i-skol ar merc'hed e 1879.

Er bloaz 1794, e oa 80 gwezen e plas ann tiez 'zo breman, hag a ioa hanvet ar C'hoat.

Chapelou ha Maneriu

Hirio n'euz nemet chapel santez Mac'harit, bet eur chapel kaër guechall, hag a zo bet raparet er bloaz 1878.

Peur liessa ar maneriu o deveze ive pep hini he damik chapel. Evelse ar C'hoatalek en doa chapel *Salventez* ha pa vezo lavaret mad, e tleer da henvel Sant-Veltaz, e gallek Jildas, evel m'eo skrivet e Buez ar Zent, ar 6 a viz C'houevrer.

Er bloaz 1764, Itron ar c'hoat-alek, a brenaz eur c'hloc'h nevez evit ar chapel-ze ; mes pa gouezaz ar paour keaz chapel enn he boull, e voue lakeat ar c'hloc'h e tour ar bourk el leac'h ma servich c'hoaz hirio da c'hervel ar vugale d'ar c'hatekiz.

E maner Trogriffon oa eur chapelik da Intron-Varia-Vir-Zikour hag a oue roet d'ann iliz goude-ze.

Ann Aotrou Adrien de L'Espine de Grainville euz ar maner-ze, a ieaz enn arme ar General Chanzi, evit difen hor bro da vrezel ar *Prus* er bloaz 1870. Pa deuaz d'ar gear e voe lakeat da Vear. Er garg-ze e chomaz betek ma varvaz, er bloaz 1905, oajet a 81 bloaz. Divar he benn e c'heller lavaret oa karet gant Doue hag ann dud : *Dilectus Deo et hominibus*.

E maner Lezireur oa eur chapel da Zant Ian-Vadezour.

E Coatploh, da Zantez Katell a Sieen.

Maner Lezireur a oue devet gant ar Zaozon, er bloaz 1594. Er memes amzer 15 ti all euz ar c'har-ter-ze a oue devet ive. (*N. C t les archives départementales*) — Vers l'an 1491, la famille de Lézireur, obtint du Roi Louis XII l'autorisation de lever une justice patibulaire, à trois potaux, sur sa terre de Lézireur, et de tenir une foire annuelle au bourg de Henvic.

Sur le terrain de Langroaz il y a eu une voie romaine, et deux garennes dénommées l'une *gvarem* ar justisou, et l'autre *goarem* ar supplisou, aujourd'hui, propriétés de Jean Marie Nicolas, du bourg de Henvic.

Maner Castellennec, evelse hanvet abalamour ma c'hellet kaout dour enn dro dezhan.

Feunteun Speur, a zo evel eur speuren pe eun disparti etre Henvic ha Carantec. Ann A. De Poulpiquet vikel vraz e Castel e 1640. a ioa euz maner Feunteun Speur.

Maner ann Heder dismantret gant ann tan goall e 1868. N'euz ket kalz a dra da lavaret divar ho fen, nag Kerilly, ha pemp pe c'houec'h maner all, dister.

Penseou

Ar 26^e a viz meurs 1751, eur *c'hobaren* euz a Henvic a reaz pense var dro ar Menec'hi peRosko, hag a gollaz 7 den. Pevar bloaz goude e oue eur pense all hag e oue beuzet 11 den. Er memes bloaz e oue c'hoaz eur pense all, hag e oue beuzet nao goaz ha teir maouez.

(Voir les registres de la Mairie de Henvic).

Setu amâ abaoue

Kantik ar besketaerien d'ar Werchez Vari.

1

Hor c'hanaouen a zo dister,
Ni zo besketaerien baour,
Hor gwiskamant na dal diner,
Mes hor peden a dal aour.

DISKAN :

Messait hor bagik vihan,
A eneb ar gwall-amzer,
Mar he diwallit, peb-unan
A lavaro pemp *pater*;
En hoc'h enor, Mamm dener,
Ni lavaro pemp *pater*, (bis)

2

Ar besketaer gand he vagik,
A die dont abars tri dez,
Mes alies 'ar reuseudik,
Er môr deun e kav eur bez.
Messait, etc.

3

Mar deu ann avel da grozal,
Bezit Mamm d'hor bugale,
N'he deuz nemed'hoc'h d'ho diwall,
Pa na vezimp ket ganthe.
Messait, etc.

Revolusion er Frans

'Pad ar Revolusion
Ho tud koz, Henvigiz,
A ziskouezaz ho Feiz,
Hag ive ho nerz-kalon,
En eur zifen ho iliz,
Ho gwir hag ho frankiz :
Ann traou-ze a garan
Hag amâ ho laran.

Pell a ioa edo ar Framasoned o klask ann tu da ziskar ar relijion gristen hag ann iliz santel katholic. Setu perag, kerkent ha ma c'heljont en em lakat e penn ar C'houarnamant, e rejont lezennou difeiz ha direol. Hiviziken, ar veleien a rankje senti ouz lezennou ar c'houarnamant, mad pe fall evel ma vijent e vijent.

D'ar 27 a viz Du, 1790, e voue douget al lezenn milliget ze. Ar veleien o doa promettet senti ouz al lezen-ze, a voue hanvet *intru* pe asermantet.

Ar veleien n'o doa ket promettet oa ar veleien fidel hag a voue ordenet dezho dilezel ho flasou evit an asermantet. O klevet kement-se, Henvigiz evel just, a zavaz kintou enno, hag en em asamblez d'ann 22 a viz genver 1792, da skriva eul lizer da republikaned Montroulez, ha da lavaret dezho,

n'o doa fizians ebed er veleien *intru* pe asermantet ; perak eta emezho lamet hor beleien diganeomp ?

Etre daou beleien Henvic, ann A. Fransez Prigent, hag Hervet a ieaz dindan guz, evit gelloud oferenna ha rei ho zakramanchou d'ar baresioniz, en noz pe enn deiz. Hag ar paresiou o doa beleien *intru*, a zigase ho bugale da Henvic da vadezi, dre guz.

Evelato kaër o devoa Henvigiz divoall mad ho beleien, an archerien a c'hellaz dont a benn da deleur ho c'hraban var ann A. Hervet. D'ann 28 a viz Maë o doa her c'haset gantho d'ar prison da Vrest. *Potred* Montroulez a gavaz eur c'hure *intru* da zigas amâ enn he blas, mes ne jomaz nemet daou pe dri miz : rak morse ne 'zea den war he dro, evel just.

Hervez al lezen nevez, ann ilizou ma n'o diche ket a veleik *intru* pe asermantet, a veze serret ha lamet ar c'hleier euz ho zourioù.

Abaden Kleier Henvic

(*Of Documents par l'abbé Peyron, chanoine,
p. 188 et suiv.*).

D'ann 28 a viz Ebrel, 1792, daou arher var loan, ha kanfarted hag o doa marc'had da zisken kleier, a voue digaset euz a Montroulez da Henvic da zisken ar c'hleier, ha da gemeret ann traou presiuz a gavjent enn iliz pe er sekreteri.

Ann *cjant* mear a ieaz d'ho c'haout hag a lavaraz dezho evellen : « Potred, emezhan, ar « mear n'ema het er gear, hag evidon-me n'ho « lezin biken da douch oc'h netra aman, hag holl « e fell deomp dere'hel mad d'hor beleien goz. »

Neuze e tiredaz d'ar vered goazed Henvic avad enn dra c'hellent, ha gantho bizier, freillou ha traou-all. Iouc'hat a reant a boëz-penn en eur lavaret : « Ia ! ia ! ma fell dehoc'h kaout kleier ha « traou-all, douar ar vered-man a zo o vont da « veza ruziet gant ho koad ! E leac'h he gas « ganeoc'h, savit doc'h-tu enn he blas ann hini ho peuz diskaret bremaik, pe ni velo.

Er memes amzer e velent oa daou ganfard-all e tress da ziskar eun eil kloc'h. Mes goazed Henvic a ieaz d'ho c'haout hag a reaz d'ann daou ganfard

disken buanoc'h eget n'oant pignet. Neuze ar goazed-ze a lopaz var ar c'hloc'h gant eur morzol, evit gervel ann dud d'ar bourg. Kerkent avad ec'h erruaz adarre er bourg eur maread mad a dud, goazed ha merc'hed, hag en em lakejont da iouc'hat d'ar ganfarted : It kuit, it kuit, prim ha prim ; rak, ni 'zo goest da frikasa kement hini 'zo ac'hanoc'h. Neuze, hor c'hanfarted, kroget aoun ennho, a ieaz kuit, en eur lezer ar c'hloc'h eno, ar c'herdin a loa servichet dezho, stag ouz ann tour, hag al lisser vraz deut gantho da baka ar pezh a c'heljent da gas gantho euz ann iliz pe euz ar sekreteri.

Ar ganfarted oc'h erruout e Montroulez a voue mall gantho tamall tud Henvic en eur lavaret oant revoltet. Potred Montroulez, braz gantho klevet an dra-ze, antronoz, 29 a viz Ebrel, a zigasaz da Henvic *120 Gard national*, eur *gompagnunez kanolierien*, daou bez kanol gantho, hag eur *brigaden* archerien : dirak kement-all a draou, Henvigiz, sklear eo, a voe red-mad dezho plega, hag asanti rei *1011* lur d'ar republikaned evit herzel ouz ho mizou. Mes n'oe ket tost dezho lakat Henvigiz da lavaret avad peleac'h oa kuzet ho beleien, na petra oant deuet da veza. Kement hor beuz gwelet beteg vrema, a ziskuez sklear peger krenv oa ar goad e goazied ann dud er barrez-man, ha peger beo ar Feiz enn ho c'halon, hag evelse oant tud euz ar re vella, ha kristenien euz ar re genta.

Taolenn

Persouned Henvic, adaleg 1646 da 1801

HANO BADEZ	HANO FAMILL	GINIDIK EUS A	ERRUET EAT KUIT	OAJOU	ENTERRET E
Jakez	Scouarnek	Taule	1646—1699	53	Henvic
Jan-Mari	Toux	Plouenan	1669—1682	57	»
Iann	Bochenan	Mespaul	1682—1690	55	»
Jakez	Quéguiner	Henvic	1690—1703	51	»
Bertrand	Spagnol	Taule	1703—1732	49	»
Jiles	Abalan	Guiclan	1732—1741	47	»
Fransez	Boule'h	Montroulez	1741—1742	31	Eleac'h-all
Renan	Bernard	Bodilis	1742—1754	52	Henvic
Iann	Pedel	Sant Thegonnec	1754—1757	33	Kerzent
Fransez	Heleouet	Henvic	1757—1770	49	Henvic
Gr. Fr.	Briant	Henvic	1770—1790	50	»
Fransez	Prigent	Taule	1790—1797	45	Guitevede

Taolenn

Ar Bersouned azalec 1801 betek 1917

HANO BADEZ	HANO FAMILL	GINIDIG EUS A	ERRUET EAT KUIT	OAJOU	ENTERRET E
Iann	Corr	Kerzent Plabennec	1779—1804	50	Guiclan
Berthele	Le Gall	Eun Eskopti-all	1804—1807	53	Meaz an Eskopti
Cesar	Marzin	Henvic	1807—1814	59	Henvic
Jan-Mari	Uguen	Plouedern	1814—1824	52	»
Perr	Breton	Sant Thegonnec	1825—1830	36	»
Fransez	Teurnier	Plougonven	1830—1830	40	Plougonven
Fransez	Ar Borgn	Plougerne	1830—1832	41	Henvic
Primel	Cabic	Cleder	1831—1837	36	Cleder
Jan-Mari	Ar Bris	Plouvien	1837—1866	77	Henvic
Jan-Mari	Pouliquen	Guiclan	1866—1891	77	Guiclan
Andre	Le Gall	Plougastel Daoulaz	1891—1898		
Guillou Vari	Ar Yaouank	Plabennec	1898—1917		

Ar veleien a Henvic enterret er barrez mâ

Er bloaz 1640, Ann Aotrou Gregor Nicolas.

1640. Rolland de Poulpiquet a Feunten-speur.

1703. Jakez Queguiner, 51 bloaz, bet Persoun e
Taule.

1750. An daou Aotrou Herry a vaner ann
Heder.

1770. Fransez Eleouet, 49- bloaz, bet Persoun
e Taule.

1790. A. Briant, 50 bloaz, bet Persoun e Taule.

1814. Cesar Marzin, 59 bloaz, maro Persoun
e Henvic.

1847. Loïz Tanguy, maro Persoun e Sant The-
gonnec hag enterret eno. Eur c'henderv dezhan,
enterret e Braspart. Ann tri Aotrou Queguiner,
Hervet, ha Mesc am, enterret e Henvic.

1886. Per Mari Messenger a Gervegen, 46 bloaz,
enterret e Mespaul.

1907. Y.-M. Messenger, Misioner 58 bloaz,
enterret e Mespaul.

1909. Charles-M. Messenger, 65 bloaz, enterret e
Mespaul, e kichen ann iliz kaër en doa nevez
savet eno.

Var beziou ann tri breur belek ze, n'o doa klas-
ketepad o buez nemet gloar Doue ha silvidigez
ann eneou, e c'heljet beza skrivet e lizerennou
aour : *Beati mortui qui in Domino moriuntur ;*
opera enim illorum sequentur illos. (Apoc. XIV 13).

Ann Iliz nevez

Ann iliz koz a ioa re vihan ha dirapar, ha poent sevel unan nevez. Ann A. Le Gall, araok beza hanvet da bersoun e Fouesnant, en doa poaniet kalz da zikour he zevel. M. Drouillard, *kabiten a lestr*, en doa roet ann douar, pe ar plas, hag en doa (19 ares 95 centiares), evit netra.

A. Serrurier (architecte) euz a Vontroulez, a reaz ar plan. Eujen Louis (entrepreneur) a Vontroulez ive, a reaz ar marc'had da ober al labour er bloaz 1899, evit (51.176 fr. 78 centimes). Siouaz ar paour keaz^e E. Louis, a varvaz gant eun taol goad, ar 15 a viz Gouere 1901, hag al labour a rankaz chom a za, epad unnek miz. He vugale, re iaouank evit peurober al labour, hen roaz da M. Ganivet entrepreneur, euz Coray.

D'ar 4 a viz meurs 1899, en em lakejot da denna ar vein e maner Trogriffon, 240 toazen etre tout. Ar barezioniz, ken etrezho, a reaz 40 jao a dri loan evit kariat ar vein ze, ha 19 bagad mein-aod ouzpenn.

Ann A. Le Gall a deuaz da vinigen ar mean kenta ar 27 a viz Eost 1899.

Tri bloaz goude-ze, p'oa great ar groz euz al labour, ann 23 viz Du, e teuaz an A. Queinnec

Persoun Taule, c'haloni a henor, da vinigen ann iliz nevez evit ma vije gellet lavaret ann oferen ennhi da c'hedal he c'honsecration. Enn deiz-ze ann oferen a voue kanet gant ann Tad misioner, Y.-M. Messager, a Gervegen, hag ar c'hantik kaër-mâ great ganthan evit ann iliz man, a eue kanet a greiz kalon goude-ze.

Ar Gonsekration, 1904

D'ann 18 a viz Maë 1904, e teuaz ann Aotrou Du-
billard Eskop Kemper ha Leon, da gonsakri hon
iliz nevez, hag e tigasaz ganthan relegou sant *Fi-
del* merzer, ha relegou santez *Aurelia* guerc'hez ha
merzerez da lakat enn Aoter-Vraz.

Chaloniet ha beleien var-dro tri-ugent a ioa bo-
det enn dro d'ann Aotrou 'nn Eskop, epad ar gon-
sekration. Ann Aotrou Goasguen, ginidik euz a
Henvic, Persoun Ploueskatez, a voue choazet da ga-
na ann oferen. Ar gouel-ze a voe kaër meurbet.
Kalz tud a deuaz euz paresiou all ive.

KANTIK ILIZ HENVIC

TON: EN EM GONZOLIT EVIT MAD.

1

Pobl a Henvic, bezit joaiuz,
Da Zoue kanit trugarez,
P'oc'h euz, goude labour boaniuz,
Savet eun iliz nevez
'Vit rei digemer da Jezuz
Hag henori Sant Vodez.

DISKAN :

Ni a ro dehoc'h a vir galon,
O Doue leun a garantez,
Dehoc'h ha da Vari hon Itron
Ni ro hon iliz nevez,
Ha dehoc'h Sant Vodez hor patron
Ker karet enn hor parrez.

2

Ia da Zoue gloar da genta,
Rak n'hellomp ket hen tevel,
Heb he c'hras ne hellomp netra,
N'hellomp kempenn na sevel
Eul lochennik ann disterra,
Dreist holl eur palez huel.

3

Hogen hoc'h iliz, Henvigiz,
A zo eur palez kaer,
Outhi pa zeller mad ha piz
Gant plijadur e veler
Ez eo din da rei lojeiz
D'hor Mestr divin, d'hor Zalver.

4

Pinvidik eo ha kaer meurbed,
Kaer ha koant 'vel eur brinsez,
Koulz ha rouanez eo guisket
Gant he zae mein benerez
Ker flour ha ker brao kizellet
Diabarz ha diavez,

Dre bep prenestr ar sklerijenn,
 Eur sklerijenn dudiuz,
 A darz pinvidik ha laouenn
 Var ann Aoter Vraz skeduz,
 O tigas sonj mad da bep den
 Eman varn'hi tron Jezuz.

Mil bennoz eta da bep den
 A ziskuezaz he Feiz
 En eur zigas he aluzen
 Evit sevel hon Iliz,
 Ra'n dezo enn env da viken
 Digant Doue lojeiz.

Sevel eun Iliz, kristenien,
 Pebez madober dispar,
 Pa'z eo, c'hui her goar koulz ha men,
 Ti Doue var ann douar,
 Feunteun a c'hrasou, dor ann env
 A zigor hent ar c'hloar.

Enn Iliz eo e vo desket
 Euz kador ar virionez
 D'ann holl gristenien euz ar bed
 Holl deveriou ar vuez,
 Eno e vez dezhoriet
 Ar guir gelennadurez.

Enn Iliz e vez kristenet,
 Var mean-fond ar Vadiziant,
 Ar bugelik nevez ganet;
 Goalc'het brao ha lakeat koant
 Ann ene a vez diframet
 Euz skilfou ann aerouant.

Mab da Zoue, breur da Jezuz,
 Ar c'hristen, hed he vuez,
 Var hent ann env striz ha riskluz
 A renk enebi bemdez;
 Enn Iliz mar ped aketuz
 E kavo grasou nevez.

Enn Iliz e vez konfirmet,
 Hag ar Gonfirmasion
 Ar ro sklerijenn d'he spered,
 A ro dezha nerz kalon
 Evit anaout hag heuil bepred
 Hent ar guir relijion.

M'en deffe, siouaz ! kalz pec'het,
 Ruillet er fank, er vouillenn,
 Enn Iliz, mar deu glac'haret
 Evit ober pinijenn,
 He holl bec'hejou diskleriet,
 E kavo ann absolvenn.

13

Pa vez goalc'het neat ar galon
Pardounet he fec'hejou,
Enn Iliz e kav eur Mignon
Diskennet euz an envou
Hag a deu dre'r gommunion
Da vaga hon oneou.

14

Enn Iliz e vez eureujet
Ann holl briejou fidel,
Eno e vezont benniget
Gant ann holl lidou Santel
Evit ma c'hellint heuill bepred
Lezennou an Aviel.

15

Ha pa vo deut pred ar maro
Evit ar c'hristen fidel,
Ann holl evithan a bedo
Enn Iliz, enn ti santel,
Evit gant Doue ma plijo
Rei dezhan buez eternal.

16

Santel eta, teir guech santel
Eo an Iliz, kristenien,
O tont ennhi, holl dud fidel,
Daoulinit ha stouit ho penn
O kinnig d'ar Roue Eternal
Ho kalon hag ho pedenn.

17

C'hui deu da glask hor c'halonou,
O Doue trugarezuz,
Deoc'hui 'vezint, o va Aotrou,
Deoc'hui Tad karantezuz,
Var ann douar hag enn envou
Mar plij ganeoc'h, o Jezuz !

Amen.

Y.-M. MESSENGER,
MISSIONER.

PERMIS D'IMPRIMER :

Quimper, le 15 Novembre 1902.

F. CORRIGOU,

VIC. GÉN.

Ar Mission braz. 5-20 Du, 1905

MEMOR EUZ AR MISSION AM EUZ GREAT E
HENVIC, ER BLOAZ 1905

O va Doue ! ra viot meulet ha trugarekeat euz an oll c'hrasou oc'h euz roet din epad ar retret euz se. Ar billet-ma, a lennin bep sul, a vezo evidon eur prezeger beo, am heulio betec va maro, hag a zigasso em speret ar zonz euz an oll gentelliou am euz clevet enna. Hag euz an aliou mad am euz recevet evit va zilvidigez. Ne bermetto ket e teuffen da ankounac'haat : 1. An ezom am boa da zonzal a zevri, ha da labourat gant muioc'h a galon da zavetei va ene ; 2. E tigasso din sonj euz ar stad paour ha reuzeudic edo va ene dre ar pec'het, hag an danjer edoun d'en em goll evit an eternite. Renevei a raio em speret an anken, ar chagrin hag ar remors a vourreve va c'houstians divarben an amzer dremenet, evel ar joa leun a garantez, a deneridigez, a fizianz a rene em c'halon epad an devezion euz se.

Ar billet-ma a zigasso da zonz din adarre, ne deuz nemet Doue hag a virit va holl c'harantez, ha penaos ar vertuz a relijion, heuliet mad, a c'hell hon renta euz, rag ar bed gant e oll blijadurezou

n'en deuz great biskoas ha ne raio biken nemet tud malheuruz. Lavaret a raio ive din, penaos hor goal-ioulou ne dint nemet tyrantet kriz a gass an den d'an tan eternal goude eur blijadur verr var an douar ma. Atao ec'h amzavin ne deuz eürusted ebed par d'an hini a gaver o karet hag o servicha Doue.

Ar billet-ma c'hoas a rafresko em speret ar promessaou am euz great da Zoue, rag anez n'en divije bet pardon ebet evidon.

Ia, o va Doue ! promettet am euz ho karet dreist pep tra, heulia ho koure'hemennou, ha diouall gant evez ouz ar pec'het ez oan kustum da ober ken alies. Promettet am euz ive, va Doue ! beza fidel d'ar beden, miret an deiz santel euz ar zul hag ar Gouëliou : tostaat ouz ar sacramanchou, heulia ar vertuziou kristen ha maga bepred va ene gant eur guir devotion. Ia, euz a greiz va c'halon em euz great ar bromessaou ze, dre ma'z oa eun dra vad ha necesser evit va zilvidigez. Mar bezan, siouas din, malhurus avoalc'h evit dilezel ar promessaou-ze, ra zeuio ar billet-ma da rebech d'am ene e fallagriez hag e ingatiri ; ra raio d'in ruzia gant ar vez, ober piniñ, ha distrei ar c'henta guella ouz va Doue.

Ann dispignou

Daou gloc'h nevez a ioa, ar brasa a boeze 970 lur ; ann eil 650 lur. Ho daou oant koustet (2.408 fr. 50), rapari ann trede hag a ioa faout a goustaz (102 fr.) O rapari ann tour hag o lakât ar c'hleier ennhan e voue ive kalz dispign.

Hon iliz nevez gant ann traou 'zo ennhî a zo koustet tremen dek mil lur ha kant (110 fr.). Ann aoter-vraz he-unan a boëze 9.380 lur, hag a ioa koustet (3.600 fr.) Eur famil euz ar bourg a roaz (800 fr.) da zikour prena aoter ar Rozera. Ar balustrou, ar c'hofesionou hag ar gwer a liou a zo ive da gonta koulz ha mean found ar Vadiziant hag ar gador zarmoun. Ann A. Clec'h euz a Vontroulez a reaz hent ar Groaz evit offrans d'ann iliz.

Ann aotrou 'nn Eskop a gargaz ann Aotrou Queinnec, Persoun Taule, da vennigen ar c'hleier, deiz gouel Mari konsevet heb pec'hed, ann 8 a viz Kerzu 1909. Ann Aotrou Duc Persoun Scaër, a ganaz ann oferen. Goude ze e voue kanet ar c'hantik kaër-man ama var lerc'h great gant ann Tad Messenger missioner :

Ann Tour 1909

Abarz sevel anntour,oue ranket gedal pemp bloaz, rak, ann eil antrepeneur, a varvaz trum ive heb achui he labour. Ann 23 Even 1909, n'oa mui nemet ar groaz da lakât var ann tour, mes deiz Gouel Yan, leun avel diroll a bilaz ar chafotou, hag ar re-man a stokaz hag hen divegaz prest goude m'oa achu ann oferen. N'oa den enn iliz, ha den n'en devoë droug, a drugare Doue. Abenn miz Du oa mad da lakat kleier.

Badiziant Kleier Henvic

An 8 a viz kerzu 1909

TON : *Kantik sant Vodez*

DISKAN :

*Sonit, sonit, kleier nevez,
Hirio, ha varc'hoaz, ha bemdez ;
Kanit meuleudi da Zoue
Var an douar evel en env. } bis.*

1

Kanit bennoz ha meuleudi
D'hor Zalver Jezus, da Vari ;
Pa ho klevint, tud ar barrez
Oll a bedo gant levenez.

2

Sonit gant ho mouezhioù lirin
An *Angelus* euz ar mintin,
Da greisdeiz ha d'ar pardaez,
Ma teuimp da veuli ar Verc'hez

3

Sonit, sonit, ha tud ar vro
Laouen sant Vodez a bedo,
Hag o vale var he roudou
Ez eimp holl eun deiz d'an envou.

4

Euz ho tour koant grit heb paouez
Grit ma kouez var ar barrez
Evel glizen dous ar beure,
Grasou nevez bennoz Doue,

5

Sonit d'ar Zul, d'an deiz Santel
Ma teui an oll, a dost, a bell,
Da glevet mad an oferen,
Ha da zelaou ar brezeg.

6

Galvit ive d'ar Gousperou
Tud ar barrez a vandennou ;
Sonit, galvit d'ar c'hatekiz
Ar vugale leiz an iliz.

7

Sonit, sonit var ar c'havel,
Sonit badiziant ar bugel ;
Sonit gant levenez ha joa
Da zeiz santel ar Pask kenta.

8

Sonit, sonit d'an eureujou.
Lavarit d'an oll briejou :
« Bevit, bevit e gras Doue
« Ha savit mad ho pugale ».

9

Pa gas ar belek he Zoue
D'ar c'hlanvour keaz var he vele,
Ma teuor evithan da bedi
Sonit klemmuz an angoni.

10

Sonit ive glaz ar maro ;
Lavarit d'an oll dud er vro :
« Pedit, pedit a vir galon,
« Pedit evit an anaon ».

11

Sonit p'hor bezo levenez,
Sonit c'hoaz p'hor bezo enkrez.
Ho mouez c'hui a zo mouez Doue,
Vad a ra bepred d'hon ene.

12

Hirio c'hui zo bet badezet
Ha gant oleo sakr konsakret ;
D'hon Eskob ker kanit bennoz
Kleier nevez ha kloc'hik koz.

13

D'ho maeronez ha d'ho paeron
Bennoz ive pa deuot da zon ;
Bennoz c'hoaz d'an neb ho teuzaz
Ha d'ar gristenien ho prenaz.

Y.-M. MESSENGER A GERVEGEN,
misioner.

IMPRIMATUR :

Corisopiti die 30 novembre 1909.

A. COGNEAU.

Santez Barba

D'an 11 a viz Gouere 1904, e oue eur barr-arne
spontuz adalek diw heur goude kreiz deiz betek
unnek heur noz. Ar gurun a gouezaz e Kerever
epad m'edot o lavaret ar pedennou dioc'h ann
noz. Ar goulou a oue mouget var ann taol, ar
c'hranj e pen ann ty hag ar bern foen el leur a
oue devet. A drugare Doue, n'oa erruet droug
gant den nag e Kerever nag e neb leac'h-all er
barrez. Sonjal a reat n'oamp bet preservet nemet
dre bedennou santez Barba a zo ker braz devo-
tion evithi er vro. Setu perak, eur pennad goude-
e oue prenet skeuden ar Zantez, hag er nemez
amzer hini sant Anton a Badou da lakat enn
iliz nevez, evel m'int bet ivez enn iliz koz.

Kantik Santez Barba

Ton : *Ni ho salud Rouanez ann elez.*

DISKAN

*Santez Barba, guerc'hez ha merzerez,
Dirak Doue, c'hui hon albokadez,
Hon dioualit eneb ar c'hurumou ;
Grit ma varvimp gant ar zakramanchou.*

He zad pañan a falveze dezhan
 'Vije Barba pañanez evel d'han ;
 Heb m'her gouezaz, Barba voue ke lenne
 Var lezenn Doue, ha a voue badezet.

2

Enn eun dourel, hed hir amzer dalc'het,
 Ouz tud ar bed Barba jome kuzet ;
 Hogen, Jezuz d'he c'halon a gomze
 Deuz priz ar c'hras hag eürusted ann env.

3

Mes, p'her guelaz 'n em voëstled da Zoue,
 He zad a iezaz 'n eur gouñnar vraz neuze.
 Evel Judas pa verzaz Hor Zalver,
 E redaz buan d'he diskuill d'ar barner.

4

Dre ann douzder ar barner da genta
 A glaskaz dont a benn euz a Varba :
 « Merc'h, emezhan, adorit hon doueou,
 » Hag ho pezo danvez hag enoriou. »

5

Mes ar Zantez a respontaz heb aoun :
 « D'arguir Doue meuzgoestled va c'haloun,
 » Ne adorin nemet ann Dreinded Sakr ;
 » Ho toueou c'hui a zo faoz ha fallakr. »

6

Lakeat nec'het, ar barner a ordren
 D'ar verzerez 'vije troc'het he fenn ;

Hag ann tad kriz 'n en ginnig da vourreo
 Evit lakat ar Zantez d'ar maro.

7

Aiaok mervel, ar Zantez daoulinet
 En em erbed ouz Jezuz he fried :
 « Salver Jezuz, me ginnig dehoc'h va bue,
 » Digemerit va c'halon, va ene.

8

« Selaouit c'hoaz, selaouit ar beden
 » A ran breman evit ar glanvourien :
 « D'ar re a deui gant fizianz d'ho pedi,
 » Roit ar c'hras d'hellout sakramanti. »

9

Var gement-se, Barba oue dibennet,
 Hag a nijaz d'ann env gant he fried ;
 Eno e ped, eüruz ha leun a c'hoar,
 Evicomp ni harluet var ann douar.

10

Tad ar Zantez, a veac'h great he dorfet,
 Gant ar gurun voue raktal pulluc'het ;
 Hag, abaoe, diouz tan ha kurunou
 Barba hor mir, dre nerz he fedennou.

11

Ni holl, Barba, evel doc'h kristenien,
 Hon deuz da stourm ouz kalz enebourien ;
 Dre ho peden gant Jezuz kennerzet
 'Var hent ann env grit ma kerzimp bepred.

Hag evidomp, pa deui pred ar maro,

Eveldoc'hui, laouen ni lavaro :

» O Dreinded Sakr, me 'ro deoc'h va ene,

» Plijet ganeoc'h he digemer enn env. »

Amen.

G.-M. AR YAOUANK.

Sant Anton a Badou, sant ar miraklou

(Cf. P. Beringer, 1. p. 220).

TON : *Pa zaoulinomp evit korez.*

M'ho peuz c'hoant da gaout miraklou,

Pedit sant Anton a Badou.

Maro, fazi hag ann enkrez

Ann diouk spered hag al lorgnez

Holl dirazhan a rank tec'het.

Ann dud klanv a gav ar ieched.

Var he c'her e teu plean ar mor

Hag ar prizoniou a zigor.

Koz ha iaouank ouz her pedi

A reseo nerz d'ho izili,

Ha p'o deuz eun dra dianket,

Heb dale pell, e vez kavet,

Ann danger a bella ivez

Hag e teu fin d'ann dienez

C'hui hag a zant enn ho kalon

Holl vadoberou sant Anton

C'hui tud euruz euz a Badou

Kountit d'ann holl he viraklou.

Pedit, sant Anton benniget

Evidomp euz ann eurusded,

Ma vezimp din euz ar grasou

A bromet Jezuz hon Aotrou.

AMEN.

Ar Vered ha Kroaz ar C'halvar

D'ar mareou-ze, oa mall braz ober eur c'hempenna d'ar vered, d'he mogeriou tro var dro, hag ive d'ar C'halvar, a ioa dirak ar porched. Eun ale nevez a oue great, hag e kreiz e oue lakeat Kroaz ar C'halvar ker brao kempennet gant ann A. Donart euz a Landerne, 600 lur.

Neuze, ann Aotrou J. Tanguy, Persoun Santec, a reaz ar c'hantic kaër-mâ enn honor d'ar Groaz :

KANTIC D'AR GROAZ

VAR TON : *J'irai la voir un jour.*

Salud ! Salud ! Salud !
Salud ! Kroaz binniget !
Salud ! Salud ! Salud !
Rën varnhomp ho!, bepred.

I

Salud ! Kroaz binniget !
Me da vel var ar C'halvar,
Da baea dle an douar,
Jesus varnhout staget.

II

Salud ! Kroaz binniget !
Abaoue, var ar bed-ma,
D'it eo bet ar plaç kenta,
Gant an dud vad dalhet.

III

Salud ! Kroaz binniget !
Dreist-holl, en hor Breiz Izel
Te 'zo bet savet huel,
Gant hon tud-koz karet.

IV

Salud ! Kroaz binniget !
Tud an dispac'h eun dervez.
Da bilaz... mez a nevez
Ni hon deuz da zaved.

V

Salud ! Kroaz binniget !
Ni da gar ha da garo !
Ken 'vo peb Breizad maro,
'Vlt na vi diskaret.

VI

Salud ! Kroaz binniget !
Keit ha ma pado 'r c'hoajou,
Ar reier en hon aochou,
Kroaziou 'vo kizelled.

VII

Salud ! Kroaz binniget !
Kroaz vean pe groaz dero !
Diraz'hout holl dud ar vro
A velor daoulinet.

VIII

Salud ! Kroaz binniget !
Ma na jom hini... Siouaz !
Peb Breizad a vo eur groaz,
He zivrec'h astennet.

IX

Salud ! Kroaz binniget !
Mont d'az heul 'zo eun henor
Hag ouzit, en hor Arvor,
Peb lagad 'zo troet.

X

Salud Kroaz binniget !
D'it va diveza sellou,
Stardet var ma muzellou,
Ken a vinn tremenet.

XI

Salud ! Kroaz binniget !
D'an Ilis te a reno
Va c'horf paour ; ha te 'zavo
Var va bez er vered.

XII

Salud ! Kroaz binniget !
Pa deui ar varn spourounus,
Te 'vezo e dourn Jesus,
Ar barner kounnared.

XIII

Salud ! Kroaz binniget !
Spountuz vo beza eno !
Hag ar pec'her a greno,
D'az beza disprijet.

XIV

Salud ! Kroaz binniget !
Lak en tu deo da Jesus,
Da veza bepred eurus,
Ar re 'deuz da gared.

XV

Salud ! Kroaz binniget !
Gwir-alc'houez ar Baradoz !
Digor deomp ha d'hon tud koz
Palez kaer an Dreindet.

Santez, le 1^{er} Mars 1906.

J. TANGUY BELEK.

IMPRIMATUR

Quimper, le 2 Mars 1906.

F. CORRIGOU,
vicaire général.

Invantor ann Ilizou

hervez lezen nevezar c'houarnamant, an'z Kerza
1903

D'ar 14 a viz Du 1906, e teuz paotred Montroulez da Henvic da glask ober ann Invantor.

Doriou ann iliz a ioa serret pa errujont. Ann Aotrou Persoun, he barresionis ha konseillerien ann iliz enn dro dezhan, a ioa enn ho za dirak ann or dal.

Setu ama petra lavaraz dezho :

Monsieur le délégué,

» Au nom du Conseil de Fabrique et de tous mes
» paroissiens, au nom des nombreux bienfaiteurs
» de cette église, et en mon nom personnel, je me
» fais un devoir de protester avec toute l'énergie de
» mon âme, contre l'inventaire auquel vous avez
» la triste mission de procéder.

» Nous vous déclarons nous opposer formelle-
» ment à cet inventaire.... Parce que notre égli-
» se toute neuve n'appartient ni à l'Etat, ni à la
» Commune. Elle est, avec tout ce qu'elle renfer-
» me, autels, vases sacrés, meubles, ornements,
» etc., propriété exclusive de la Fabrique et de gé-
» néreux donateurs. L'honorable M. Emmanuel

» Drouillard a donné le terrain, le regretté M.
» Adrien de Grainville a donné les pierres pour la
» construction.

» Nous vous refusons donc l'entrée de cette é-
» glise pour l'inventaire dont il s'agit, et, s'il est
» passé outre, faisons toute réserve pour l'avenir,
» en invoquant le droit, la justice et la liberté. Et
» si un jour, on employait contre elle la force ou-
» verte, les fidèles de Henvic sauront, comme leurs
» ancêtres en 1792, faire un rempart de leurs corps
» pour défendre leur Dieu et la maison qu'ils lui
» ont élevée. »

Alors, M. le Recteur demande à ses paroissiens :
Etes-vous d'avis que l'on procède à l'inventaire ?
— Non, non, jamais, jamais. l'église nous appar-
tient, nous sommes chez nous, vive la liberté !
répondirent-ils. Sur ce, le délégué et ses hommes
se retirèrent sans avoir fait l'inventaire. Les portes
de l'église furent ouvertes pour y laisser entrer les
paroissiens ; le Recteur les remercie d'être venus
si nombreux, et M. le Curé de Taulé donna la
bénédiction du Très Saint-Sacrement.

Mais les agents du fisc ne se tinrent pas pour
battus et revinrent à la charge quelques jours après ;
cette fois ils étaient accompagnés d'une compagnie
de soldats et d'une brigade de gendarmes à cheval.
Ils crochèrent la porte de l'église et forcèrent
l'inventaire fut fait.

Leve ann Iliz

Red mad e voe d'ann iliz gwerza he leve a-benn sevel ann iliz nevez. Daou bark hepken a oue dalhet evit ar zervichou a fondation. Mes, hervez al lezenn nevez, ar c'houarnamant a entente gellout lakat he c'hraban var madou ann ilizou, ha setu ma lakeaz guerza ann daou bark-mâ (71 ares 30 centiares); d'ar 25 a viz Even, 1914, e oue great ar verzhidigez e Montroulez, hag ann Aotrou Falhon a c'hellaz ho vrena e kount an iliz, 2,500 lur. Kement-se muioc'h he godel ar c'houarnamant. Ahanta!!!

KANTIK

da Sant Sebastien ha da Sant Rok

TON : Hor c'halon baour mantret
Gant glac'har hag enkreiz...

SANT SEBASTIEN

DISKAN :

Aotrou Sant Sebastien,
Patron ar zoudarded,
Pedit Doue d'ho difenn
Vit na vint ket flastret.

1.

Enebourien Bro-C'hall
'Zo kriz ha didruez !
Plijit 'ta hon diouall,
En han' Doue truez !

2.

Eveldomp c'hui a zo
Ginidik euz ar Frans,
Ha dre ze tud hor bro
Ennoc'h o deuz fizians.

3.

C'hui 'zo soudard Jezuz,
Skoazell ar Verzerien,
Bezit trugarezuz
Ouzomp ni kristenien.

4.

Dre vertuz ar birou
Oc'h bet gantho treuzet,
Pellait diouz hon eneou
Birou ann drouk spered.

5.

Sellit ouz ar c'hlanvour
A c'houlenn ar iec'hed,
Roit dezhan sikour,
C'hui zo treac'h d'ar c'hlenyed.

6.

Kalz, gant ann obuzou
'Zo blesset, pe lazet !...
Diouallit en trancheou
Hon paour keaz soudarded.

7.

Aotrou Sant Sebastien
Hastit da zigeri
Var ar brizounerien,
Ha mont d'ho c'honzoli.

8.

Goulennit digant Doue
Lakat fin d'ar brezel,
'Vit ma teuint adarre
D'ar gear heb dale pell.

9.

C'hui dre ho meritou
A c'hell kaout evidomp,
Digant Doue hon Aotrou
Ar c'hras a c'houlennomp.

SANT ROK

1.

Evel Sant Sebastien
Eo gallouduz Sant Rok,
Ar vosenn, ann dersienn
A dec'he enn-he raok.

2.

Dre zin ar Groaz hepken
'Barz enn hospitaliou
E torre ann dersienn,
E tousea ar poaniou,

3.

Pedomp-hen da gas pell
Diouzomp ann teir goalenn
'Vel ma 'z eo ar brezel,
Ar gernez, ar Vosenn.

4.

Ar barrez-man, — Sant Rok —
'Zo bet ato guechall
Diouallet mad ganeoc'h,
Kendalc'hit d'he diouall.
Kendalc'hit d'he diouall.

AMEN.

G. LEJEUNE,

Recteur d'Henric.

IMPRIMATUR :

1^{er} Novembre 1915.

HENVIGIZ

En eur gloza al levrik-mâ, ho pedan da heulia aliou diveza ho Persoun koz dare da renta kount da Zoue euz hoc'h eneoù fiziet ennhan.

Lavaret a rin d'ehoc'h komzou ann Abostol sant Paol gwechall d'ann Hebreed. (Hebreed. 13.) « Va breudeur emezhan; dalc'hit sonch euz ar bastored pe an veleien o deuz prezeget d'ehoc'h komzou Doue, ha pa velit penaoz o deuz tremenet ho buez, heuilhit ho Feiz. Jezuz-Krist a ioa deac'h, a zo hirio hag a vezo varc'hoaz, arabat eta beza o chench kreden evit heulia divroidi. Sentit gant doujanz ouz ho pastored, int a glask mad hoc'h ene, rak da Zoue e rankint renta kount anezho. »

Evidoc'h c'hui, Henvigiz, n'ho peuz ket a leac'h da gaout aoun da fazia; rak lavaret a c'hellit gant ar c'hatkiz: Gouzout a ran emaoù er guir Iliz, abalamour va Persoun a zo a unan gant he Eskop, hag ann Eskop a zo a unan gant ar Pab, penna ann Iliz katholik, ha dre-ze oun sur da veza enn hent mad.

Setu aze kreden ho tadou koz a zo c'hoaz sonj anezho eun ho tiegeziou. Diskuez a rejont oant bugale d'ann Iliz katholik, pa deuz ar Revolution-vraz. Tec'het a reant dioc'h ar veleien reuzeudik a

reaz eul le ehismatik, hag e risklent ho buez evit kuzat ar veleien a ioa chomet fidel, abalamour n'oa nemet ar veleien-ze hag a c'helje maga ho eneoù dre ar zakramanchou. Komprenit dre eno peger krenv oa ho Feiz ! Hogen, ar Feiz-ze eo kaëra tenzor oc'h euz bet digantho enn heritach.

Trugarekall eta ann Aotrou Doue, Henvigiz, eus ar c'hras en deuz great d'eoù da c'henel ha da veza savet enn eur vro hag a zo, evel pa lavarfen, katholik betek mel he eskern, euz ar c'hras en deuz great d'ehoc'h da veza bugale d'ar guir Iliz, n'euz silvidiget ebet er meaz anezhi.

Ton: pec'het am euz, ha kalc' pec'het.

Karit hoc'h Iliz hag ho pro:
Neuze netra d'eoù ne vanko.
Rak se, tud keiz divar ar meaz,
Oh ! na dit ket d'ar c'heariou-braz.
Eno 'foraner ann danvez,
O klask kuzat ar baourentez.
Siouaz ! ar Feiz kristen ive.
'Zo e riskl braz d'ober pense.
Chomit tost d'hoc'h iliz nevez,
Karit dont ennhil aliez,
Dreist-holl d'ar zuliou, d'ar goueliou,
D'ann oferenn, d'ar gousperou.
Ha neuze, da fin ho puez,
Ann Doue leun a vadelez,
A roio d'ehoc'h ar gurunen
Ha gloar ar vuez heb termen.

AMEN.

Méulet ra vezo Jezuz-Krist
Hag he Vamm, ar Verc'hez-Vari !

AMEN.

EVIT KLOZA

Ton : *Al lochenn.*

Lennit breman va zamm leorik,
Buez sant Vodez, hag histor Henvic).

.....
Em guele douar pa vezin,
Tost, pe bell, dioc'h hoc'h Iliz nevez,
M'ho ped da gaout truez ouzin,
C'hui sant Vodez, Patron ar barrez ;
C'hui Henvigiz a lavaro
'Vit ho persoun ivez eur beden,
Neuze Doue a bardouno
D'ann distera euz ho peleien,
Ha d'am ene paour a roio
Joa ar Baradoz da virviken (*bis.*)
Lavarit ann *De profundis*
'Zo peden truezuz ann Iliz :
A greiz dounder va fec'hejou
Em eus kriet ouzoc'h, oa Aotrou,
Aotrou, aotrou, bezit truez !
Klevit, va Doue, ouz va mouez ! *Amen.*

GUILLOU VARI AR YAOUANK.

persoun Henvic.

TAOLENN

	pajen
Guechall.....	2
Hon tud koz.....	3
Relijion.....	5
Modez.....	7
Taolennou.....	11
Santez Ulven.....	14
Relegou.....	16
Kantik S. Vodez.....	17
Henvic.....	21
Iliz koz.....	22
Bourg.....	23
Chapelou.....	24
Maneriou.....	24
Foar.....	25
Penseou.....	26
Revolusion.....	28
Abaden Kleier.....	30
Persouned.....	32
Beleien Henvic.....	34
Iliz nevez.....	36
Konsecration.....	38
Kantik ann Iliz.....	38
Mission.....	44

Dispignou.....	46
Ann Tour.....	47
Badiziant Kleier.....	48
Santez Barba.....	51
Sant Anton.....	54
Kroaz ar vered.....	56
Invantor.....	60
Leve an Iliz.....	62
S. Sebastien-Rok.....	62
Aliou diveza.....	66
Evit kloza.....	68
Taolenn.....	69



Sanl-Brieg. — Ti mouleres Sant-Gwilherm, bali Charner

